

Ar Falz

Genver-Meurz 1947 — Niverenn 7

**AR
GOULENN-DIMEZI**

PEZ-C'HOARI

en eun arvest

renket e brezoneg diwar

Anton TCHEC'HOV



PEZIOU-C'HOARI YANN GOUER

B R E S T

— 1947 —

FB

891.

682

TCH

AR GOULENN-DIMEZI



Diocèse de
Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

10789

Ar Falz

Genver-Meurz 1947 — Niverenn 7

63
891.
682
TCH

AR
GOULENN-DIMEZI

PEZ-C'HOARI

en eun arvest

renket e brezoneg diwar

Anton TCHEC'HOV



PEZIOU-C'HOARI YANN GOUER

B R E S T

— 1947 —



TUD AR C'HOARI

STEFEN SKRAGN, intañv, 60 bloaz.

KATELLIG, merc'h Stefen, 25 bloaz.

LOM BOUZELLOK, 35 bloaz, anezañ eun den
maget-mat, liou ar yec'hed war e zioujod.

AR GOULENN-DIMEZI a zo bet c'hoariet e brezo-
neg evit ar wech kenta e Plouhineg d'ar 24 a viz
kerzu 1946 gant c'hoarierien Kelc'h U.J.R.F.
Plouhineg : J. Losq, M. ar Berr ha J. Bideau,
dindan renerez A. Trividig. E Keridreuf (ar
Pont), d'ar 25 a viz kerzu 1946, hag e Plozed,
d'ar 1^a a viz genver 1947, O. ar Berr eo a rae
Katell.

*E ti Stefen. Eun daol, diou gador, eur
skaoñ.*
.....

*LOM a deu tre, chupenn lost-pig ha
manegou gwenn gantañ.*

STEFEN, o vont etrezeg ennañ, hag oc'h
astenn e zorn d'ezañ. — Ac'hanta, Lom
Bouzellok, va c'hamalad Lom Bouzellok !
Pegen eürus ouz ho kwelout, va mab !
(O starda e zorn d'ezañ) Keit all a zo
n'am eus ket gwelet ho penn ! Eur bli-
jadur, m'hen tou ! Ha penaos emañ
ar bed ganeoc'h, mignon ?

LOM. — Braoik, mat-tre, Stefen Kergi-
davreg ! Na ganeoc'h ?

STEFEN. — Ker braoik all, va mab, ker
braoik all. Azezit 'ta, va faotr. Petra
c'hoari ganeoc'h pa n'hon eus ket gwe-
let ac'hanoc'h tro amañ ker pell all zo ?
Lom Bouzellok va c'honsort, n'eo ket
dereat d'eoc'h dilezel evelse ho migno-
ned hag amezeien... Met, lavarit d'in,

petra zo a-nevez ganeoc'h pa welan ac'hanoc'h gwisket-kran evelse... Chupenn kiz-kêr, ha ler gwenn war ho kro-c'hen : emaoe'h o vont da friko eur mon-dian bennak da Gemper marteze ?

LOM *nec'het*. — Nann, nann ; n'oun deut er-maez va zi hirio nemet da zont betek ennoc'h, Stefen Skragn Kergida-vreg.

STEFEN. — Ha neuze 'ta, da ziskouez d'in ho tilhad nevez an hini eo ?... N'emañ ket c'hoaz erru deiz kenta 'r bloaz, hañ ?... (LOM *a chom dilavar*, STEFEN *a ginnig d'ezañ eur gador*) Mat, grit eun azez, kamalad !

LOM *a gouez war ar gador, hag en em lak da skrabat e c'hourlañchenn, evel eun den a yafe da vouga*. — Hem ! Hem !

STEFEN, *o redek da gerc'hat eur skudellad dour*. — Hopala, va bouchig-me ! Bac'h ! Bac'h !... Gortozit : arabat d'eoc'h taga en ti-mañ diwar re sec'hed !... (LOM *a lonk ar banne dour kinniget d'ezañ*.) Ha bremañ, Lom Bouzellok, ma 'z eo skarzet d'eoc'h toull ho kouzoug, lavarit d'in 'ta fraez ha sklaer pezh a zo war ho kalon.

LOM *o sevel en-dro en e sav*. — Dious-



tu e ouezoc'h... (*o kregi e brec'h Stefen*).
Deut oun d'ho kaout, Stefen Kergida-
vreg, da c'houlenn diganeoc'h eun dra...
eun dra ha ne... ha na... feiz, eun dra...

STEFEN. — An aret a zo krog ennout ?

LOM (*o c'hagouilh*). — Neket !... Neket... met... Hem ! Gouzout a reoc'h, a-viskoaz omp bet en em glevet ; meur a wech am eus bet tro da c'houlenn diganeoc'h eun taol-skoaz, ha bep taol, e gwirionez, ho peus bet graet eus ho kwella evit... Daonet vin, Stefen, trefuet ha mesket eun distera eo va spered d'an eur-mañ... Ret eo d'in paka eur banne all, me lar... Digarezit ac'hanon, Stefen Kergidavreg. (*Goulonderi a ra ar skudell zour*).

STEFEN, *outañ e-unan*. — Asa ! vi pe labous eo a zo gant da yar, paotr ?... Klaoustre eo gant ar verrentez-arc'hant eo taget ar balbouser-mañ... Kae, kae atao, va bihanig, c'hoant peus da welet liou gwenneien yalc'h tonton Stefen. Mat ! e c'hellez fiziout warno : ne vezo ket prestet d'it eun diner eus va re... (*Da Lom*) Petra zo 'ta, e gwirionez, va mab-me ?

LOM. — Setu, setu, Stefen Skragnek... Skragn Skragn Kerstefen... nann ! Ste-

fen Kergida... Oiyou ! pegen strafuilhet oun-me... Ha n'eo ket gwir oun strafuilhet spontus ?... Mat, n'eus nemedoc'h hag a c'hellfe va sikour en digouez-mañ, daoust ma n'am eus-me graet netra da... da... da lavarout eo... (*en em deurel a ra en e gwez war ar gador*).

STEFEN *outañ e-unan adarre*. — He-mañ, an amparfal-mañ, a zo o klask suna arc'hant diganen-me, re anat eo... Gortoz, va aelig, gant ar forc'h e vint roet d'it, gant ar forc'h ! (*Da Lom*) Arabat d'eoc'h troiata evelse, paotr paour ! Bremañ ret eo d'eoc'h gouzout eo bet kazi rivinet Stefen Kergidavreg ar bloaz-mañ.

LOM. — Rivinet Stefen Kergidavreg ?

STEFEN. — Ya, rivinet, pe hanter... Va gwiz koz a zo maro evel ouzoc'h : setu aze eiz mil lur kollet, hep konta ar boan...

LOM. — Gouzout a ran, Stefen.

STEFEN. — Ha va buoc'h ruz am eus ranket he gwerza war goll...

LOM. — Ya, met...

STEFEN. — Penaos, te, Lom Bouzellok, mab eur c'houer eus an dibab evel ma oa da dad, ha ne gomprenet ket eo eur rivin rankout rei evit koulz ha netra eur

vuoc'h paet ken ker all, ha goude maro d'in eur wiz eus ar c'henta evel an hini a oa amañ.

LOM. — Entent mat a ran... Nemet...

STEFEN. — Ha va fatatez aet da netra gant ar c'houiled flerius-se, hag ar se-c'hor o padout keit-all, ken na 'z ay da netra ar bern amann araok an eost, hag ar gouarnamant o kreski d'eomp an tailhou adarre...

LOM. — D'eoc'h-c'houi, d'in-me ha da bep hini, Stefen, heñvel eo d'eomp...

STEFEN, *droug ennañ*. — Heñvel ? Met perak eta dont da c'houlenn arc'hant digant eur paour kaez koz evel don ha ne vo ket eur pezh ugent real ken war e gont warc'hoaz, ma talc'h an traou da drei e-giz ma reont ?

LOM. — Goulenn arc'hant ?... Met n'am eus ket-me goulennet arc'hant diganeoc'h, Stefen, ha deut aman d'hen ober n'oun ket... Deut oun, deut oun da c'houlenn diganeoc'h rei d'in ho merc'h Katellig e dimezi !... Mat, deut eo ganen an taol-man !

STEFEN, *o koueza war ar skaoñ a zo en e gichen*. — Da glask va merc'h e oas deut... o mabig koant !... da glask va merc'h ha ne oas ket gouest da lavaret

kentoc'h ! Goulenn adarre 'ta, va rannig-me, ma welin hag-heñ em eus klevet mat...

LOM, *sonn war e dachou, hag o tistaga fraez*. — An enor am eus, Stefen Skragh Kergidavreg, da c'houlenn diganeoc'h beza ar vadelez rei d'in...

STEFEN, *o vriata anezañ trumm-hatrumm, ha da c'houde oc'h ober daoig d'ezañ war e gof*. — O ! Lomig Kofig Kofok, Lomig Bouzellig Bouzellok, va faotr bihan-me, pebez laouenidigez a lakaez hirio e kalon Stefen goz. (*O vriata anezañ diou wech all*). Sell, laouen oun ken n'oun laouen awalc'h. Pebez kelou ! (*O sellout outan, krog en e ziouskoaz*) Keit all a zo ma soñjen en dimezi-se !... Va soñj-me eo bet a-viskoaz !... Dalc'hmata em eus karet ac'hanout evel eur mab d'in. Ra zeuio d'eoc'h eur grubuilhad Bouzelleien vihan... Ra zalc'ho war-noc'h holl chañs hag eurvad an aotrou Doue e-doug eur vuhez hir... Met, trible ! petra ran-me amañ, amboubal koz ma 'z oun, o chom aze dirazout. Koll a ran va fenn, ha koll amzer war ar marc'had... Mont a ran da c'hervel Katellig.

LOM, *o terc'hel krog e brec'h* STEFEN. — Ha kaout a ra d'eoc'h, Stefen, ha kaout

ra d'eoc'h em eus eur chañs bennak e raio-hi ker brao digemer ha c'houi d'am goulenn ?

STEFEN. — Ac'hanta, va bouchig bihan, daoust hag aon kaout ar sac'h eo a rae d'it balbousat bremaik ?... Merc'h Skragn Kergidavreg o nac'ha eur paotrig gouest ha kreñv evel d'out, hag heñ pennhêr gouenn Bouzelleien Toull-ar-Gurun, evelato, ne soñjez ket ! M'hen tou ruz, da sod-pitilh eo ez ay ganit, va mab, da sod... Mont a ran d'he c'herc'hat d'it : emañ o lakaat da zena an torrad moc'h bihan nevez bet, — rak ma 'z eus maro emañ eur wiz koz, peadra a oa en ti da brena unan all raktal, te oar... (*Da LOM, e pleg e skouarn*) Pa zeuio Katellig amañ, lavar d'ezi ar pezh a zo dleet, hag arabat d'it beza nec'het evel bremaik... Ar merc'hed n'eus ket da glask troidella ganto, nemet mel a vije en da gomzou... Kae d'ezi hardiz !... (*O rei d'ezañ eur vloñsad en e skoaz*) Tribble ! pa oan-me da oad !... (*Eur stlakadenn sec'h gant e deod, hag heñ kuit er-maez, o tridal gant al levencz*).

II

LOM *e-unan*. — Ha setu-me gwall-nec'het adarre ! Ken na sao riou em c'horf hag eo krog ar c'hrenerez ennon... Hep dale e vo-hi amañ dirazon. Biskoaz ne gredin diskleria d'ezi pezh am eus da lavarout. Ret-mat eo koulskoude. Dre forz dalea ha gortoz kaout war e hent eur goantenn, eur vaouez kaeroc'h ha gwelloc'h evit ar re all, e troer da baotr yaouank koz... Re wir eo : ma choman bloaz all c'hoaz va-unan e vin re ziwez-zat... O ! Katellig Skragn Kergidavreg n'eo ket mui eur plac'h yaouank en he bleuñ kennebeut : n'eo ket eus ar re goanta, anat eo, met eur peziad maouez eo-hi, liou ar yec'hed warni, ha labourus, ha spered d'ezi ar pezh zo ezomm. Petra c'hellan soñjal kaout gwelloc'h ? He fenn he deus avat, a lavar gwall deodou ar barrez... Ba ! me ouezo ober ha lakaat anezi da blega ha da senti pa vo ret... Evelato n'am eus biskoaz goulennet maouez ebet... Gant ma ne bakin ket va sac'h !... Aiou, va fenn ! (*Eva ra eur skudellad dour*). Dao d'in dimezi koulskoude. Setu-me krog gant va femp

bloaz-ha-tregont, ha klañvidik e-giz m'emaon : lamm-kalon evit an distera tra, poan en va c'hein pe en va divorzed a bep eil, diouz ma c'houziz pe ma amont an avel, poan-gof hag all, bep tro ma stok va genou ouz eur werennig lambig... Dalc'hmat eun dra bennak o lakaat an nervednou da virvi ennon : e-giz bremañ, sellit, krena ra kroc'hen va lagad dehou, hag e santan evel spilhou-tan en va bruched, aze... oïou ! Ha, pezh a zo gwasoc'h c'hoaz, n'oun ket evit kousket eun nozvez war ziou. A-vec'h ma vezan gourvezet en va gwele, youp ! e-giz eun taol-kontel o vont diouz va bronn dehou en va skoaz kleiz hag o sevel d'in tre betek va fenn. Evel eun tenn, setu me neuze maez va gwele hag o vale en noz dre an ti. Pa soñj d'in emañ brevet da vat va nervednou, e c'hourvezan adarre etre va liñseriou, ha youp ! an dro-mañ eo en va skoaz dehou eo e santan eun taol-kontel o vont en va c'hostez kleiz hag o tiskenn da vrouda d'in va fenn an traoñ. Ha nozvezioù zo e c'hoarvez an abadenn-se eun ugent gwech bennak !... Ma ! n'eus ket da darta : dao eo d'in dimezi, kaout eur wreg da ober war va zro, hag eur geginerez

vat diouti. Ar melisin en deus lavaret d'in debri traoù dous ha dre laez da derri d'in nerz va nervednou ha da zistana va gwad. Traou evel (*o konta war e vizied*) pouloud, fars pitillig, stripou kerne, krampouez-logod, bara ranig pe c'hoaz bara-mouchenn... Me gav d'in e ray Katellig an afer mat-tre (*Trouz bou-teier-koad er-maez*). Ou, la ! setu-hi o tont... Ai, va c'halon !...

III

KATELL, *o tont tre*. — A ! c'houi an hini eo, Lom Bouzellok ? Ha va zad hag a lavare d'in : « Kerz 'ta da welout en ti : eur marc'hadour n'ouzon ket petra zo eno, deut da ginnig eun dra hag a blij kenan-kenan d'it hervez va soñj ». Demat atao, Lom Toull-ar-Gurun.

LOM. — Demat d'it, — d'eoc'h, Katellig Kergidavreg.

KATELL. — Digarezit ac'hanon da veza daleet eun tammig. Oc'h ober wardro va moc'h bihan e oan... Met, lavarit d'in, Lom Bouzellok, perak an diaoul oc'h chomet keit all hep dont betek an ti ?

Ne weler ket mui ar skeud ac'hanoc'h tro amañ... Azezit 'ta. Gant mern-vihan e chomoc'h, 'michañs ?

LOM. — Nann, trugarez ; n'oun ket boaz da zebri fra etre mern ha koan.

KATELL. — Pegen kaer an amzer hirio, neketa ? N'eo ket evel dec'h. Nag a c'hlae a zo bet. Ken n'o deus ranket an dud chom en ti e-toug an deiz. Labour awalc'h a zo koulskoude gant ar foenn da droc'ha... Met, pa soñjan, fichet oc'h hirio, Lom Toull-ar-Gurun. Petra c'hoarvez ganeoc'h ? Daoust hag emaoch o vont d'eur fest-noz bennak da zañsal, en abardaez-mañ ? Hep ober fougeou d'eoc'h, Lom, tenna reoc'h d'eun den-tre er c'hiz-se.

LOM. — Katell Kergidavreg, me a garfe e selaoufes... e selaoufec'h ac'hanon... Eun dra a-bouez bras am eus da ziskleria, da ziskuilha d'eoc'h. Marteze e teuy ar souez d'eoc'h, marteze zoken e savo droug ennoc'h, dre m'am bo bet kredet... Hum, setu... (*Outañ e-unan*) Oi ! ar c'hrenerezh adarre !

KATELL. — It ganti 'ta rauze, Lom Bouzellok. (*LOM a chom dilavar*) Ac'hanta, petra zo ?

LOM. — Ya, mat, ne vin ket pell...

N'emaoc'h ket hep gouzout, dimezell Katell, — en em anaout a ra hon diou familh abaoe eur viken. Va zad-koz-me hag ho tad-koz-c'houi a zo bet mignoned a viskoaz. Skragned Kergidavreg ha Bouzelleien Toull-ar-Gurun, dalc'hmat ez eus bet darempredou difachiri etrezo, e-giz m'eo dleet etre amezeien vat. Rak amezeien omp : beza zo lod eus hon douarou stok-ha-stok : e ouzoc'h mat, eun tamm douar-lann am eus du-se, e Lost-ar-C'hoad, harp d'eur waremm d'eoc'h.

KATELL. — Digarezit ac'hanon. C'houi lavar : « Eun tamm douar-lann am eus e Lost-ar-C'hoad. » Petra fell d'eoc'h lavarout ?

LOM. — Feiz ! eur c'horn eus va douar-lann e Lost-ar-C'hoad a zo stok ouz ho kwaremm-c'houi. Ha n'eo ket ar wirionezh ?

KATELL. — A gav d'eoc'h marteze. An tamm douar-se avat, n'eo ket d'eoc'h, met d'eomp-ni.

LOM. — Ac'hanta, dimezell Katell, ha bez e komzomp eus ar beskell a zo e Lost-ar-C'hoad etre Gwaremm-ar-Menez hag ar C'hoad-Pin ?

KATELL. — Ya, dres, etre Gwaremm-

ar-Menez hag ar C'hoad-Pin, e Lost-ar-C'hoad.

LOM. — Ma d'in-me eo ar beskeñ a netra-se, evel m'eo d'in ar C'hoad-Pin e-unan, aze n'eus douetañs ebet, Katell Kergidavreg.

KATELL. — Setu amañ traou nevez avat. Hag abaoe pe da vare eo d'eoc'h-c'houi beskeñ Lost-ar-C'hoad, Lom Bouzellok ?

LOM. — Feiz, dalc'hmat eo bet d'am zud... Ha n'eo ket dre ma ne dalv d'in da netra ar c'hoz tachennad douar sec'h-se eo ne chomo ket war va ano.

KATELL. — Asa, paotr, fazia reoc'h !

LOM. — Paperiou a zo, kement ha ma karin, da broui eo d'in-me. Gouzout awalc'h a ran ez eus bet trouz ha rendaelerez, gwechall-goz, war zigarez an dachennig-douar-se ; met bremañ e oar kement hini eo d'in-me. N'heller ket lavarout ar c'hontrol. Klevit mat ac'hanon. Tad-koz va zad en doa roet koñje da nized tud-koz ho mamm da leskel o saout da vont da beuri war ar waremm-se. Da c'houde-se, Lan Vozeg koz a zalc'has da gas e saout dre eno bep an amzer, e-pad eun ugent pe eun daou-ugent vloaz bennak. Ken na teuas moar-

vat da gredi e oa d'ezañ an tamm douar. Ha pa zigouezas d'ho mamm, goude maro Lan Vozeg, kaout lod en e vadou, e kredas-hi ive marteze e oa beskeñenn Lost-ar-C'hoad d'ezi evel ma oa Gwaremm-ar-Menez. Koulskoude, anat eo diwar ar paperiou am eus du-mañ...

KATELL. — N'eo ket tamm ebet en doare-se emañ an traou, Lom Toull-ar-Gurun ! N'eo ket hepken tonton Lan Vozeg hag en e raok nized tud-koz va mamm, met tad ha tad-koz ar re-mañ hag a selle ouz beskeñ Lost-ar-C'hoad evel ouz lodenn bella Gwaremm-ar-Menez, — nemet eur c'hoz kleuz hanter freuzet a zo etre ar waremm hag ar beskeñ. N'eus ket da uza teod diwar-benn an dra-se, ha souezet oun, Lom Bouzellok, o welout ac'hanoc'h oc'h ober eur reuz ar mil diaoul evit...

LOM. — Diskouez a rin va faperiou, Katell Skragñ Kergidavreg.

KATELL. — O klask ober goap emaoe'h, paotr ! Penaos 'fa ! Setu en tu all da dri c'hant vloaz m'emañ ar beskeñ-se etouez madou ar Skragñed, — ha c'houi o tont da lavarout n'eo ket d'eomp ! War va feiz, Lom Bouzellok, ne gredan ket re va diskouarn... N'eo ket da lava-

rout e talv eur gwall dra an tamm douar-se. E gwirionez ne gav ar saout hag an deñved ennañ nemet eur begad peuri sec'h bennak etre ar bodou lann koz, hag e rofen anezañ d'an neb a garfe evit nebeutoc'h eget kant skoed. Met d'eomp-ni eo ha n'oun ket evit anduri e vije sellet outañ e-giz ha pa ne vije ket. Ne andurin ket, a lavaran d'eoc'h, na ne rin !

LOM. — Selaouit ac'hanon, me ho ped. Bugale nized tad-koz ho mamm...

KATELL. — Nized bugale mamm va zad-koz, pe bugale tad-koz nized va mamm... Me n'ententan ket eur seurt en ho rimodel. Ne gomprenan nemet eun dra : ar beskeñ a zo d'eomp-ni.

LOM. — Nann, d'in-me.

KATELL. — D'eomp-ni, a lavaran d'it. E c'hellfes chom aze daou zervez all da c'hlaourenni, o klask diskouez d'in eo da dra-te, ha dont amañ dek gwech all gant eur c'harrad paperachou koz, hag eun noter, ha testou, pep a chupenn lost-pig a-istribilh ouz o c'hein egizdout-te, ar parkad douar-se a zo d'eomp-ni, d'eomp-ni e chomo, ha peoc'h gantañ pelloc'h ! Ne garfen ket kemer eur spilhenn diwar madou va nesa, met ne faot

ket d'in e ve paket eur blouzenn diwar va danvez-me. Evelse eo emañ.

LOM. — Evit lavarout gwir, Katell Skragn Kergidavreg, ar beskeñ-douar netra-se, n'oun ket nec'het gantañ e mod ebet, n'oun ket ker stag-se outañ, hag e roan anezañ d'eoc'h a galon vat, pa blij d'eoc'h kement-se. Ar pezh a lavaren, da zifenn va gwir e oa, tra ken.

KATELL. — Feiz, nann avat, n'out ket nec'het tamm ebet ! Setu te o kinnig d'in ar pezh a zo d'in dija !... Gwall souezus e kavan an doare ganit, Lom Bouzellok. Kent ha bremañ hon doa sellet ouzit evel ouz eun amezeg mat. Warlene hon eus bet prestet d'it hon dornerez, goude beza prestet hor falc'herez, pa oa direnket da hini, hag ouspenn eur wech 'peus bet kirri ha kezeg an ti-mañ evit mont da gerc'hat treustou, ha pleñk, ha mein, d'ar mare ma oas o sevel da graou nevez. Hag, e-giz bennoz Doue, setu te o tont da c'hoarzin goap ouzin amañ...

LOM. — Ata ! merc'h ar Skragn, lavar 'ta dioustu kement hag ober ez eus eul laer ac'hanon. D'it da c'houzout koul-skoude, n'am eus morse en va buhez kemeret tra ebet da zen, ha ne c'houzañvin morse, klevout a rez, morse, beza

tamallet pe da skrapa dre nerz, pe da flipa dre guz eur geuneudenn diwar zouar ar re all. (*Diskenn a ra eur mell banne dour er werenn a zo dirazañ hag e kas anezañ d'an traoñ en eun taol.*) Ha n'eus ket da glask pemp pao d'ar maout : tachenn-douar Lost-ar-C'hoad a zo d'in.

KATELL. — N'eo ket gwir. D'eomp-ni an hini eo.

LOM. — D'in-me.

KATELL. — Me a ziskouezo da gement pabor zo egizdout da biou eo : hirio, n'eo ket warc'hoaz, hirio e vo troc'het al lann e Lost-ar-C'hoad.

LOM. — Petra, petra ?

KATELL. — Ya, bremaik-touchant e vo kaset tud di da droc'ha ar bodou-lann eiz pe zek vloaz a zo eno.

LOM. — Me o c'haso kuit.

KATELL. — Ne gredi ket ober.

LOM, *sounn war e dachou hag ar gounnar o starda d'ezañ e zaouarn war e vruched.* — Eo ! me o c'haso kuit, hag e laoskin va chas war o lerc'h.

KATELL. — Arabat d'it gwic'hal e-giz se. M'emaout da veza paket gant eur gaouad araj, ra vo maez an ti-mañ da vihana. Keit ha ma chomi amañ avat,

arabat d'it ober kement a dalabao hag a cholori.

LOM. — Ma ne vije ket bremañ va c'halon o c'haloupat ennon e-giz ma ra, ma ne vije ket va fenn war-nes tarza, e lavarfen d'it meur a dra (*oc'h hopal a-daol trumm.*) E lavarfen d'it eo ar beskell-douar-se d'in-me.

KATELL, *ken kreñv all.* — Ha me, e respontfen d'it eo d'eomp-ni.

IV

STEFEN, *o tont en ti.* — Petra zo ? Petra c'hoarvez ganeoc'h, p'emaoc'h ho-taou o youc'hal evelse ?

KATELL. — Va zad, lavarit 'ta da hemañ an aotrou-mañ, da biou eo ar beskell-douar a zo e Lost-ar-C'hoad, etre Gwaremm-ar-Menez hag ar C'hoad-Pin : d'ezañ, pe d'eomp ?

STEFEN, *da LOM.* — E feiz avat, d'eomp-ni eo, va faotrig ker.

LOM. — Digarezit ac'hanon, Stefen Kergidavreg. Abaoe pegeit amzer eo d'eoc'h-c'houi ? Soñjit ervat, c'houi, da nebeuta : tad-koz va zad en doa roet

koñje da nized tud-koz ho kwreg da gas o saout da beuri e Lost-ar-C'hoad hag an dud vat-se o doa kemeret ar boaz da c'houde da sellout ouz ar waremm-mañ eun tammig evel ha pa vije bet d'ezo e gwirionez. Ha neuze...

STEFEN. — Digarezit ac'hanon d'ho tro, va mignon. Dizoñjal a reoc'h penaos ma ne bae neotra an dud vat-se d'ho tad-koz...

LOM. — Nann, da dad-koz va zad.

STEFEN. — Ya, lakaomp, da dad ho...

LOM. — Nann, da...

STEFEN. — Kaer ho po, lavarout a rin ar pezh am eus da lavarout. Ma ne bae neotra nized tud-koz va gwreg eo dre ma oa savet tabut, pell a oa, etrezo hag ho tad-kuñv, pe ho tad-you, me oar-me, diwar-benn gouzout da biou oa ha da biou n'oa ket beskell Lost-ar-C'hoad. Breman avat e oar kement hini er c'harter eo d'eomp-ni. Ouspenn-se n'eus nemet mont da welout en ti-kêr d'ober.

LOM. — Me a ziskouezo d'eoc'h skler evel an deiz eo d'in. Paperiou am eus a laka anat eo d'in-me.

STEFEN. — E c'helloc'h diskouez ho paperiou ! Eur sac'had koz traou didalvez va c'hamalad...

LOM. — Gwelet e vo, Stefen.

STEFEN. — Fors penaos, n'eo ket gant safari evel bremaik eo e teuoc'h a-benn da broui oc'h perc'henn da Lost-ar-C'hoad. Ha klevit mat, paotrig bihan, ma talc'hoc'h da gonta eo d'eoc'h-c'houi an dirienn-se, e vo lakaet e gwerz ganin-me.

LOM. — E gwerz ganeoc'h ?

STEFEN. — E gwerz ganin, ya !

LOM. — Oc'h ober goap emaoch, Stefen.

STEFEN. — Piou an hini a zo oc'h ober goap ouz egile, amañ, me c'houlenn ? Gwall zivergont e kavan ac'hanoc'h, den yaouank. Me n'oun ket boaz e ve respontet d'in ken dichek gant marmoused eus hoc'h oad.

LOM. — E feiz avat, Stefen goz, c'hoant ho peus lakaat ac'hanon ken sot hag eur bugel bet dec'h. Setu c'houi o lavarout eo d'eoc'h ar pezh a zo d'in e gwirionez, hag e karfec'h e talc'hfen da varvailhat ganeoc'h war va fouezig evel ha pa ne zeufe maez ho kenou nemet komzou fur ha leal ! N'eo ket evelse eo e reer etre amezeien vat. Eun amezeg souezus an hini oc'h, Stefen Skragn, eul liver-geier, ya, eul liver-geier...

STEFEN. — Hañ ? Petra 'peus lavaret ?

KATELL. — Ma vijen c'houi, va zad, e kasfen bremañ-dioustu tud an ti da droc'ha al lann en tamm douar-se.

STEFEN, *o vont da LOM.* — Lavarit 'ta eur wech all...

LOM. — Me a lavar d'eoc'h ho po kelou diouzin-me hep dale pell. Barnerien a zo e Kemper...

STEFEN. — Aze e weler mat piou oc'h : setu kavet ganeoc'h eun digarez evit sevel prosez adarre. Heñvel-put ouz ho tad, tremenet gantañ e vuhez o tua paper-timbr, ha dalc'hmat o klask c'houen e loerou ar re all. Tenna reoc'h da dud ho familh, ha ya 'vat !

LOM. — Difenn a ran ouzoc'h disme-gañsi va familh. Va zud-me n'eus bet morse en o zouez a foultr-e-stal evel ho preur Saik Godell-doull a zo bet ranket lakaat foar warnañ ablamour d'e zleou...

STEFEN. — O, bez' e c'helloc'h fogasi, c'houi, gant gouenn ar Vouzelleien ! M'en dare pet anezo a zo aet da chom en ospital ar re-sot !

KATELL. — Ya, en ospital ar re-sot !

STEFEN. — Hag ho tad-koz, Yann Gour-lañchennek, hag a veze gwelet bemdez-goulou o ruza er foziou gant e reoriad.

Hag ho tonton Fañchig, lezanvet Lonk-e-werenn, dre m'en doa kemeret skouer re vat diwar e dad, hag a lipas peadra e hini goz dindan tri bloaz. Hag ar yaouanka eus e verc'hed, ar galkenn-se, daoust ha n'eo ket hi eo he deus lakaet, gant he buhez diroll, an dizurz da ren e meur a di dre amañ ?

LOM, *hanter vouget.* — Ha c'houi, boulom koz, daoust hag ho mamm, diouz m'am eus klevet konta... (*Outañ e-unan*) O ! al lamm-kalon... hag an taboulinoù a glevan en va diskouarn !... (*Uhel, o youc'hal*) Dour ! eur werennad-dour !

STEFEN. — Sellit 'ta ouz ar c'hrak-aotrou-mañ, gant e galon dimezellig ! Ar c'hofou bras evel an hini a zougez-te ne dalvont netra d'eur gwaz, mab ar c'hagn : n'eus nemet gwad panez e-barz !...

KATELL. — Tarza ray gant ar vez ! Ha koulskoude n'eus ket bet digaset da soñj d'ezañ e voereb all, Jani Fri-butun, ar strakell goz-se hag a...

LOM, *outañ e-unan.* — Ne zalc'han ket ken war va gar gleiz... (*A vouez uhel, da STEFEN*) Eur fistouler koz n'oc'h ken, hag eun trubard, prest atao da lae-

rez fiziañs ho prasa kamalad evit c'hoari d'ezañ eun taol-judas da c'houde. Pa zo bet kaoz da... (*Oulañ e-unan*) Va daoulagad ne welont ket hanter ken, va brec'h dehou a zo evel maro... (*A vouez uhel*) Va zog, en an' Doue, va zog, buan !...

STEFEN. — Ya, poent eo d'eoc'h mont kuit, loundig fall, amprevan, hailhon, flerier, poent eo d'eoc'h ma n'ho peus ket c'hoant kaout va botez en ho pragez termaji !

KATELL. — Ha redit buan da welout barnerien, alvokaded hag ucherien Kemper gant ho panerad paperiou. A ! a ! a !

(*LOM a red kuit er-maez.*)

V

STEFEN. — Kerz gant an diaoul, lorgnek, koz urupailh, kof-yod !

KATELL. — Pebez loen fall ! A, ya ! bez' e c'heller fiziout en amezeien !

STEFEN. — Sklankenner ! Ribler ! Laer gann !

KATELL. — Ma n'eo ket mez ! Lipa madou an dud all, c'houenna d'ezo o



godellou ha dont c'hoaz da c'houde d'ober al lu ganto, en o zi ! (*O c'hoarzin*) Paket en deus e begement avat, hag aet eo kuit lostok, fler en e loerou.

STEFEN. — Bern teil ma'z eo ! Ha pa soñjan e oa deut hennez amañ, komzou flour en e c'henou ha manegou gwenn en e zaouarn, d'ober e c'houlenn !

KATELL. — D'ober e c'houlenn ?... Peseurt goulenn, va zad ?

STEFEN. — Feiz, eur goulenn-dimezi. C'hoant en doa, an aneval louz zo anezañ, c'hoant en doa fortuna ganit.

KATELL. — Fortunia ganin ?

STEFEN. — Ya, al labaskenn, ar c'hof gwak-se, deut e oa, sañset, da c'houlenn ac'hanout da bried d'ezañ.

KATELL. — Da c'houlenn ac'hanon... Me... da bried d'ezañ ?... (*Koueza ra war ar skaoñ hag en em laka da hirvoudi.*)

STEFEN. — Ata ! Petra c'hoarvez ganit ?

KATELL. — Galvit anezañ endro... galvit anezañ endro... Buan, buan !

STEFEN. — Piou ' peus c'hoant a vije galvet endro ?

KATELL. — Heñ, heñ, Lom Toull-ar-Gurun !... A ! fallaat a ran ! Galvit anezañ endro ! Semplet oun !

STEFEN. — Penaos e kav d'it e c'hellfen, goude ar pezh a zo bet bremaik...

KATELL. — Prest oun da vervel... Digasit anezañ amañ, pe eo echu ganin...

STEFEN, *o starda e benn etre e zaouarn*. — O tad dinatur ma'z oun ! E tlefen en em grouga, pe, d'an nebeuta, en em veuzi.

KATELL. — A ! mervel a ran. Hastit affo ! Digasit anezañ endro !

STEFEN. — Mont a ran, mont a ran ! Arabat d'it gopel e-giz-se ; gortoz ! gortoz ! (*Mont a ra maez, tiz warnañ, hag e klever anezañ o c'hervel Lom.*)

Lom Bouzellok, o !

VĪ

KATELL, *o tont enni hec'h-unan*. — Petra hon eus-ni graet ?... (*Drouk enni*). Perak ive n'en deus ket va zad lavaret dioustu pezh a oa deut hennez da ginnig d'in ?... Daoust hag e faot d'ezañ kemer ac'hanon da bried bremañ ?... O ! Lom Bouzellok n'eo ket mui eur paotr yaouank flamm, -met fortun vat zo gantañ : sellet e vez outañ evel unan.

eus brasa juloded ar barrez. Yec'hed dister a zo d'ezañ, diouz e glevout, atao poan amañ, poan aze, met an dra-se n'eo nemet ardou ha similhaou, e nerven-nou o labourat : me ouezo lakaat anezañ war e du mat ha reiza d'ezañ e imor. Kintus eo, douget atao da glemmichat evel eur vaouez koz, ha loariek war ar marc'had, ma 'z eo gwir kement a lavar an dud : met n'eo ket ganin-me e c'hoario e benn bihan !... Ma karfe labourat muioc'h gant e gorf bras, e wellafe d'ezañ eun tamm mat... Met, da c'hout eoa, perak 'ta ez eus savet c'hoant dimezi da vestr Toull-ar-Gurun, bremañ, eun tammig war ar c'hoz, rak ne-dle ket beza pell ken moarvat diouz e zaou-ugent vloaz ?... Piou oar ? marteze c'hoant gantañ kaout eur vaouez da ober war e dro, da veza moumounet ganti e-giz eur bugel ha dreist pep tra, evitañ da gaout eur geginerez a ray d'ezañ e seiz bolontez ? Rak an aotrou Lom a zo figus : ar merc'hed a oar pep tra, ha me 'm eus klevet ne zebr nemet traou dous ha dre laez, en abeg d'e yec'hed fall, e lavar, -evel ha pa c'hellfe beza klañv e gwirionez eun troc'had den evel-tañ !... Ma, fazia a reoc'h, paotr paour,

ma kav d'eoc'h e tremeno an traou evel-se ! Pa vin mestrez an ti e Toull-ar-Gurun, e vo boued druz ha kreñv war an daol, ha n'eo ket lipouserez : kig-sall, patatez, yod-kerc'h, eur boued start ha fetis, graet evit tud a boagn en o micher hag o deus c'hoant chom beo ha stag o zreid ouz an douar... A ! Lomig Bouzel-lok, eur vaouez evel don eo ho peus ezomm abaoe pell zo, eur vaouez a ouezo an tu da sioulaat d'eoc'h ho nerven-nou ha parea ac'hanoc'h da vat diouz ho remm hag ho poaniou-red, hag a zesko d'eoc'h penaos kaozeal... Gortozet ho peus betek bremañ evit dont da c'houlenn ac'hanon : me a dalvezo d'eoc'h an dra-se, paotrig bihan !... (*Nec'het*) Daoust ha dont a ray endro avat ? Gwall bell e chomont... (*Trouz er-maez*) A ! setu tud o tont...

(STEFEN a zeu tre.)

VII

STEFEN. — Setu-heñ ! Ra 'z ay gant an diaoul-ruz ! Lavar d'ezañ ar pezh a gari hag en em glev gantañ mod a gari : d'in-me ne fell ket ken chom e-kreiz etrezoc'h ho-taou.

KATELL. — Pelec'h emañ ? pelec'h emañ ?

STEFEN. — 'Man o tont war va lerc'h, a laran d'it !... A, spontus eo kaout eur verc'h da zimezi !... Lavaret hon eus a bep seurt d'an den-se, ha lakaet anezañ da dec'hout kuit gant ar vez... ha kement-se dre ma peus bet klasket...

KATELL. — Dre m'am eus bet klasket, me ?

STEFEN. — Ac'hanta, dre va faot-me an hini eo ? Daoust ha n'eo ket te an hini he deus... (*An nor a zigor*) Heñ eo... poent eo d'in kas va zreid pelloc'h. (*Mont a ra maez*).

VIII

LOM, o tont tre, dislivet ; outañ e-unan. — Va c'halon o taoulammat... Va diskouarn o taboulinat...

KATELL. — Tommet eo bet d'eomp eun tammig bremaik, Lom Bouzellok. Pardont d'in ! Deut eo d'in ar soñj endro : d'eoc'h-c'houi eo an douar-lann-se e gwirionez.

LOM. — An douar-lann-se ? A, ya !...

an douar-lann ! (*Outañ e-unan*) Ha va daoulagad hag a zo paket ive !

KATELL. — Ya, parkadig Lost-ar-C'hoad a zo d'eoc'h : d'eoc'h-c'houi an hini eo !... Azezit 'ta ! Ni eo a oa faziet.

LOM. — Va Doue, ne oa ket peadra ober reuz gant ken nebeut a dra. Ne oa nemet da zifenn va gwir eo e lavaren d'eoc'h...

KATELL. — Mat, klevet eo. Ha bremañ, daoust ha n'hallfemp ket kaozeal eus traou all ?

LOM. — Digaset em bije bet d'eoc'h ar paperiou o tiskouez ken skler hag an deiz en doa tad-koz va mamm, nann tad-koz va zad, roet koñje d'ho mamm-goz, nann d'ho mamm-guñv, da lavarout eo da...

KATELL. — N'eus ket fors ! Akord omp war gement tra... (*Outi hec'h-unan*) Pe naos lakaat anezañ da ober e c'houlenn... (*Da Lom*) Ha soñj a zo ganeoc'h mont da gonkour Landerne gant ho kezeg, Lom Bouzellok ?

LOM. — E soñjal mont e oan, ya, sur, Katell Kergidavreg, gant va c'hazeg Bailh. Ne vin ket evit mont bremañ, avat... Dichañs am eus : n'ouzon ket petra zo c'hoarvezet ganti, met savet zo goriou d'ezi en he sol.

KATELL. — Dichañs eo d'eoc'h, sur. Penaos eo erruet ?

LOM. — En em c'hloazet hep gouzout d'in, pe piou oar, paket ganti eun tach bennak, hag eo deut da c'hor. N'hall ket mont maez ar gêr evit ar pred. Kerse eo d'in ! Eul loen ken kaer, a vefe aet ar priz kenta ganti sur awalc'h e Landerne.

KATELL. — A gav d'eoc'h, gwir, Lom Bouzellok ?

LOM. — Ar priz kenta a lavaran d'eoc'h, ha ne fazian ket ! Gwelet ho peus ar gazeg-se o labourat lies gwech, Katellig Skragn. Daoust ma ne vez ket gwall ampart ar merc'hed da briza ar c'hezeg, lavarit d'in evelato pelec'h ho peus bet gwelet kreñvoc'h ha kae-roc'h loen egeti ?

KATELL. — N'oun ket gouest awalc'h da varn ar c'hezeg, me, a gred d'eoc'h ? Eur mell fazi eo d'eoc'h adarre, Lom Toull-ar-Gurun... Ret eo d'eoc'h gouzout : me, n'oun ket eus ar seurt mer-c'hed-se ha n'anavezont tra en tu all d'o zi, d'o yer ha d'o amann : me, amañ, a well pep tra hag a oar diouz ar c'hezeg kerkoulz ha diouz ar saoud... Ha c'hoarzin a rankan pa glevan ac'hanoc'h o kana ken bras meuleudi d'ho kazeg

Bailh... Petra ne c'hellfemp ket lavarout, ni, neuze, diouz an Hini C'hell a zo er marchosi amañ ?

LOM. — Hoc'h Hini C'hell dreist d'am Hini Bailh, an dra-se marteze eo a fell d'eoc'h lavarout ?... A ! feiz avat !

KATELL. — Ya, dreist, sur !... Eun tammig yaouank eo c'hoaz, mes pa vo graet e vemprou da vat ganti... me lavar d'eoc'h ne vo ket eur gazeg frammet koulz hag hi dre ar vro-mañ...

LOM. — Re striz he bruched, da genta...

KATELL. — Ha muzulet ho peus he bruched evit lavarout eo strisoc'h eget bruched hoc'h Hini Bailh ?

LOM. — Bez e c'hellfemp muzula, ma karoc'h...

KATELL. — Ha neuze, an Hini C'hell amañ, gouenn zo enni... He mamm a oa Finetig, hon eus gwerzet warlene da Chob Landi, a vez, evel ouzoc'h, o prena kezeg dre amañ evit roue bro-Saoz... Elec'h ho Pailhenn, he frenet ho peus digant eun trafiker laer bennak ha n'oc'h ket evit gouzout a belec'h e teu pe ne deu ket...

LOM. — Ne rofen ket anezi d'eoc'h evit pemp loen evel hoc'h Hini C'hell, a zo

eur gazeg, ne lavaran ket fall-fall, met eus ar seurt a gaver a-zousennou.

KATELL. — Evelato, Lom Bouzellok, c'houi a zo eun den re labouret gant ar c'hoant dislavarout ar re all ha kaout atao gwelloc'h pe vravoc'h egeto. Bremaik e sonje ganeoc'h e oa d'eoc'h douarlann Lost-ar-C'hoad. Ha bremañ e fell d'eoc'h lakaat ho Kazeg Bailh dreist d'an Hini C'hell amañ ! Hag o c'houzout mat koulskoude e talv hor C'hell-ni dek gwech kement hag eul loen evel hoc'h hini.

LOM. — Diouz a welan, Katell Skrag, e kav d'eoc'h n'oun ket gouest d'anaout eur marc'h sod diouz eul loen reiz... Evelato, n'eus den tro amañ ha ne oar ket eo ho Kazeg C'hell spontik evel eun torrad koulined...

KATELL. — A ! an dra-mañ n'eo ket gwir avat !

LOM. — Anavezet eo koulskoude gant ar barrez a-bez.

KATELL. — N'eo ket gwir, n'eo ket gwir !

LOM. — Arabat d'eoc'h fulori e giz-se, dimezell Katell.

KATELL. — Ha c'houi, chomit 'ta hep distaga sotoniou ! Spontus eo ! Kredi

lakaat e-skoaz eur gazeg yac'h ha galloudus evel hini an ti-mañ gant eun tamm loen fall evel hoc'h hini, gouest hepken da stleja eur c'harr goulo.

LOM. — Da stleja eur c'harr goulo !... O ! n'oun ket evit chom pelloc'h da gle-vout ac'hanoc'h !... Adarre al lamm-kalon, adarre an taboulinadeg !...

KATELL. — Dleet oa d'eoc'h chom hep choul kement all !

LOM. — Dre druez, Katell, chomit peoc'h. Tarza ray va c'halon ha va fenn !

KATELL. — Chom peoc'h ne rin ket, ken n'ho pezo anzavet pezh a zo ar wirionez : e talv va Hini C'hell ugent gwech kement hag ar c'hoz bided fall a zo e marchosi Toull-ar-Gurun.

LOM. — Kant gwech nebeutoc'h eo e talv. Ra greñvo mik al lastez kazeg, ar galkenn, al loen lous !... A ! va daoulagad !... A ! va fenn !

KATELL. — Ho loen-c'houi n'he deus ket da greñvi : hanter vrein eo dija, eur c'hagn flerius n'eo ken !

LOM. — En an' Doue, tavit, tavit ! Pa lavaran d'eoc'h emañ va c'halon ha va fenn o vont da darza !

KATELL. — Evit tevel ne rin ket, kamalad !

IX

STEFEN, *o tiredek en ti.* — Petra c'hoari ganeoc'h ? Aet ar moc'h en ed-du adarre ?

KATELL. — Va zad, respontit d'in, fraez ha didro : pe loen an hini brava, an hini starta an hini galloudusa, ar Gazeg C'hell amañ pe al loen Bailh a zo e Toull-ar-Gurun ?

LOM. — Stefen Kergidavreg, me ho ped : ha n'eo ket va Hini Bailh eun tammig ledanoc'h, digoroc'h he bruched eget hoc'h Hini C'hell ?

STEFEN. — Ha pa vefe ? petra vern ? An Hini C'hell amañ a chomfe memez-tra brava kazeg ar c'hornad.

LOM. — Goude an Hini Bailh, eveljust, n'eo ket 'ta ?

STEFEN. — Va faotrig bihan, distantit eun tammig, ha selaouit ac'hanon. Ho kazeg Bailh, meur a dra vat a zo enni a-dra-sur : mentet ha mempret brao, eur chao eo a c'hell plijout... Koulskoude, ret eo d'eoc'h anzav eo dija kosoc'h eget an Hini C'hell amañ, hag an dra-se evelato a gont eun tamm bennak...

LOM. — Gortozit eur pennadig, Stefen

goz... Greomp evel ha pa ne vefe ket al loened-se, unan d'in hag an hini all d'eoc'h-c'houi... N'oc'h ket evelato hep gouzout petra zo bet emgavet pa 'z eo bet an Hini C'hell el Lanneg evit difontadeg gwarimier Yann Gergelen, a-unan gant va Bailhez-me ha kezeg an amezeien. Ret eo bet disternia anezi diouz an alar bras, c'houi oar mat, pa ne rae nemet pennfolli, ha torret he dije bet ar sugellou pe mac'hagnet al loened all panefe eo bet distaget.

STEFEN. — Ya, moarvat !... Ar mevel yaouank 'm oa kaset ganti en doa roet eur roustad d'ezhi en hent, en abeg moarvat m'en doa ranket mont d'an difontadeg an deiz-se elec'h da foar Merzer da welet e garedig, evel ma oa e soñj ober. Hag heñ eo a oa bet lakaet da vleina ar c'hezeg. N'eo ket souez eta ma sponte eun nebeudig al loen en e gichen.

LOM. — Ar pezh zo sur, eo bet lakaet loen Ivonig Pennsivi en he lec'h, ha n'eus ket bet ranket disternia va Hini Bailh.

STEFEN. — Geier, geier toud ! Va c'hmalad bihan, santout a ran eo kalz gwelloc'h d'eoc'h kaozeal eus traou all. Peotramant ez eus traou, sellit, hag a lavarfen deoc'h...

LOM. — Ha me ive ez eus traou zo a zigasfen d'eoc'h da soñj...

KATELL. — Kit 'ta ! Arabat d'eoc'h derc'hel war ho teod fall : dibunit d'eomp eul lostad geier all...

LOM. — Eo, derc'hel a rin war va zeod, rak emañ adarre al lamm-kalon...

KATELL. — A ! ya, ho kalonig paour !... En eur gador vouret eo emañ ho plas, e-tal an oaled, gant eun tasad laez tomm en ho kichen, evel eun tad-koz debret gant ar remm !

STEFEN. — Gwir eo, ha re wir ! Paour kaez denig paour, gant e galon dalc'hmat o vont da darza, hag e ziskouarn o vould outañ !... Hag e faot d'ezañ c'hoaz dont d'ober fougeou dirak an dud en o zi !... Eul labourer-douar, c'houi ? Eun den eus ar vicher da sevel loened ?... A ! a ! Pa oar holl dud ar c'harter ne zalc'hfe ket stal Lom Bouzellok en he sav panefe ar chañs en deus da gaout eur mestr-mevel evel Cheun Gamm, ne chom feal d'e di nemet dre m'eo re goz evit mont e lec'h all... rak evit ar pezh a vez paet !...

LOM. — Petra ? petra faot d'eoc'h lavarout ?

STEFEN. — Ya, ya, ma c'hellfe Yann

Toull-ar-Gurun, ho tad, gouzout petra eo deut e bennhêr ! Goude beza labourer e-toug e vuhez da zastum madou d'ezañ, e vefe stad ennañ moarvat o welout e vab o c'hoari ober e aotrouig : o vont da zigas e arc'hant da gement milisin a zo e Kemper pe e Brest, war zigarez beza klañv, sañset, elec'h terri e gorf eun tammig war al labour, evel ma ra kement den zo dre emañ...

LOM. — Me ?... me ?...

STEFEN. — Ya, c'houi, c'houi ! Re izel eo deut an douar evidoc'h. abaoe m'emaoc'h o klask dreveza ar juloded... An aotrou-mañ a ya da chaseal, mar plij, gant noter ar barrez, ha gant ucher pe archer...

LOM. — Da nebeuta, chaseal eo a ran-me, ha n'eo ket lakaat lasou-kroug evel ma rit c'houi, brakonier koz ma 'z oc'h !

STEFEN. — Lavar an dra-se 'ta eur wech all, teod an diaoul !

LOM. — Ha n'eo ket gwir e vez ar Skragn koz dalc'hmat o stenna lasou war gement kleuz hag e kement balaneg zo dre emañ ? An dra-se a zo chaseal marteze ?

STEFEN. — Ha ne davi ket, glabouser ?

LOM. — Laerez jibier d'ar re o deus paet ar gwir d'o faka, setu pezh ez eo !

STEFEN. — Lampon fall, gra-netra !

LOM. — Krafer lous ! den piz ! Ano ar Skragn koz da nebeuta n'eo ket bet laerret gantañ !

STEFEN. — Peoc'h gant da c'henou, hañ ? pe e vi mouget ganin !

LOM. — Kaout a ra d'eoc'h e vin-me spontet ganeoc'h ?... Gout a reer mat, pa oa beo hoc'h hini goz, e tapec'h bac'hadoudou ganti ken alies ha bemdez !

KATELL. — O, an aneval fall !... Te da nebeuta e pefe ezomm beza strilhet eun tammig gant eur vaouez ! Amprevan !

LOM. — A, setu ! graet eo ganin ! tarzet eo va c'halon ! Emaon... emañ... (*hag e kouez war ar gador*)

KATELL. — ... O vont kuit, me lar !

LOM. — Emaon o vont da vervel... (*Semplet eo*)

KATELL. — Sellit 'ta ouz an aotrou, ar julod, ar chaseour !... (*Goude beza sellet outan a dost*) Petra c'hoarvez gantañ ? Va zad, petra zo c'hoarvezet gantañ ? (*O strilha anezañ, ha nec'het*) E oan o lavarout en doa ezomm beza strilhet gant eur vaouez ; n'ouzon ket avat pe-seurt vad e ray dezañ... Lom Bouzellok !... Lom Bouzellok !... Lom Toullar-Gurun !... Maro eo... Petra hon eus-ni

graet ! Lac'het hon eus anezañ !... (*O strilha Lom adarre*) Lom Bouzell... Lom Bouzell !... Setu me intañvez ! (*Koueza ra war ar gador all a-dal da Lom*)

STEFEN, *etrezo o daou*. — Petra zo ? Petra zo erru ganeoc'h ? Petra zo erru ganit ?

KATELL. — Mervel ran... Mervel ra... Mervel reomp... (*Hanter semplet eo ; klemmichat a ra*)

STEFEN. — Dour ! dour !... Eur melisin, daou velisin, melisined !... (*O lakaat eur werennad dour ouz muzellou Lom*) Ev 'ta, ev 'ta, gurun ! N'ev ket, anezañ, heñ hag a gare kement ar gwerennadoudour ! N'eo mui biken !... O tad fall ma 'z oun ! Perak am eus gortozet betek bremañ evit en em grouga, en em vouga, en em veuzi, pe en em stlepel barz eur puñs ! (*Lom a ra eur fiñvadenn*) A, setu anezañ o tont endro ennañ e-unan. (*O kinnig dour adarre da Lom*) Ev 'ta, ev !

LOM, *abafet*. — Pelec'h emañ ? Petra welan ? Petra zo ? (*Katell a sav he fenn*)

STEFEN. — Ac'hanta ! dimezit hag eureujit buan ha buan, ha neuze tec'hit kuit pell diwar va zro d'en em zrailha

ho taou ! (*Tapout a ra krog en o daouarn ; da Lom*) Asanti a ra-hi ! Asanti a rez-te ! Asanti a rit'ho taou ! Ho pen-niga a ran-me ! Ha bremañ, kit pelloc'h !

LOM, *ken abafet atao*. — Petra ? Asanti a ra-hi ? Piou ?

STEFEN. — Ya, ya, pokit an eil d'egile, ha kuit, prim ha dillo, ma ne glevin mui trouz war va zro !

KATELL. — Ya, gwir eo, asanti a ran !

STEFEN. — Ata, ha poka a ri d'az kwreg, 'benn ar fin ? (*Katell a astenn he fenn*)


LOM, *goude beza poket da Gatell*. — Eun den-tre oc'h... Met petra zo amañ e gwirionez ?... (*Sevel a ra*) Ai ! va fenn !... Ai ! va divesker !... O, bremañ 'm eus soñj, kompren a ran ! Katellig Kergidavreg, pegen eürus oun-me !

KATELL. — Ha me ive a zo eürus, Lom Bouzellok Toull-ar-Gurun !... Ret eo d'it avat anzav bremañ ne dalv ket an Hini Bailh an Hini C'hell.

LOM. — Digarez ac'hanon, Katellig, talvezout a ra muioc'h, d'am soñj.

KATELL. — A, nann avat ! da benn fall a rez adarre !

STEFEN. — Dalec'hit da vont evelse, bu-gale ! Met arabat d'eoc'h fiziout ken war



Stefen goz evit ho tispertia ! (*Ouz an dud*)
Hiviziken, n'emelin ken diouz traou an
daou bried mat-mañ ! Trawalc'h 'm eus
bet klevet !... Ha bremañ, mont a reomp
da drinka en enor d'eoc'h, ha sal' m'en
em glevoc'h atao evel bremañ. (*Paka ra
gwerennou hag eur voutailh*)

LOM. — An Hini Bailh...

KATELL. — An Hini C'hell...

STEFEN, *o sevel e werenn*. — D'ho
yec'hed, bugale ! Ha chañs d'ar Vouzel-
leien vihan gouzout en em zifenn ker-
koulz ha mamm ha tad !

Diwez

Renket e brezoneg gant

A. KRAVEL.

Ar Renner : A. KRAVEL, Dirinon (F^{re})

Ti-Moulerez I.C.A.

17, Rue Jean-Jaurès, BREST

3-47. Dépôt Légal 1947, 1^{er} trimestre

N° 7671